



KARTA IMPLIJ INTERNET, AR ROUEDADOÙ HAG AR SERVIJOÙ LIESVEDIA

Skolaj Diwan Jakez RIOU Kemper

RAKLAVAR

Er skolaj e vinner kinnig d'ar skolajidi an aozioù labour gwellañ, ispisial gant an urzhiataerezh : dafar, meziantoù, rouedad diabarzh hag Internet. Ober gantañ zo perzh stummerezh ar skolajidi kement ha perzh obererezh ar gelennerien. Pep skolajiad en deus gwir da implijout an urzhiataerezh, pezh a emleg pep hini da zoujañ d'an dafar ha da reolennoù mont-entro 'zo evel meneget er reolennoù diabarzh. Evit mad an holl, ret eo da bep implijer doujañ d'ar garta-mañ ha d'ar reolennoù diabarzh.

DA GENTAÑ PENN EMAÑ RET DOUJAÑ D'AL LEZENN

Perc'henniezh kefredel : gant gwirioù an aozerien n'eus ket gwir da eilañ, eskemmañ na skignañ sonerezh, meziantoù, c'hoarioù video pe n'eus forzh peseurt oberenn gant rouedad an ti.

Gwirioù an dud : n'eus ket gwir da implijout ar rouedad urzhiataerezh evit strewiñ kunujennoù pe dre-vras nozout da enor ha da vuhez prevez unan bennak (difennet eo strewiñ keloù faos diwar-benn unan bennak all hag embann titouroù prevez).

Torfedoù ha drougoberioù : n'eus ket gwir da skignañ pe da sellet ouzh teulioù gouennelour, estrengas, abostolek, maboriadek, pornografek pe a gas da ober traoù maez al lezenn (ober gant dram, meuliñ torfedoù...).

BEZET AR PEZH ZO DA HEUL

1. Ar skolidi o deus gwir da ober gant ar servijoù da heul

Servijoù urzhiataerezh

- ✓ Ober gant moullerezioù : diouzh an doareoù divizet gant ar skolaj.

KARTA IMPLIJ INTERNET, AR ROUEDADOU HAG AR SERVIJOU LIESVEDIA

Eil derez Diwan

- ✓ Ober gant pladennoù kalet diavaez / alc’hwezioù USB : evit abegoù surentez n’eo ket aliet an dud d’ober gant binviji diavaez.
- ✓ Ober gant ar skanerez : diouzh an doareoù divizet gant ar skolaj.
- ✓ Eilañ meziantoù : n’eus ket gwir da eilañ na staliañ meziantoù (gwirioù an aozerien - virus – mont-en-dro ar rouedad). Dindan atebegzh ar skolaj eo e vez staliet meziantoù nevez.
- ✓ Ober gant an holl veziantoù lakaet e-kerz gant ar skolaj.

Servijoù Internet

- ✓ Gallout a ra ar skolajidi ober gant Internet evit an deskiñ.
- ✓ Miret eo ar boestoù lizhiri elektronek evit an deskiñ.

Aozioù implij

Roet e vez da bep implijer un anaouder hag ur ger-tremen ma c’hell kennaskañ ganto da servijer urzhiataerezh ar skolaj ha da Internet. An anaouder hag ar ger-tremen zo hiniennel ha kuzh. Kiriak eo pep implijer d’ar pezh a vez graet ganto : dindan e giriegezh e vefe roet da unan bennak all ; mar c’hoarvez un torradur-lezenn e vo lakaet ar c’hastiz d’an hini a zo anavezet dre e anv kennaskañ.

2. Doujañ da reolennoù dleadouriezh an urzhiataerezh

2.1 Endalc’hoù an ti-skol

- En em ouestlañ a ra ar skolaj da zoujañ d’al lezennoù (d’ar re a denn d’an urzhiataerezh, d’ar fichennaouegoù ha d’ar frankizioù, d’ar vuhezegezh ha d’an talvoudoù demokratek, d’ar berc’henniezh kefredel).
- Strivañ a ra ar skolaj evit derc’hel digor dalc’hmat ar Servij, met gallout a ra hen stankañ forzh pe abeg a vefe, ispisial abegoù teknek, hep bezañ lakaet da giriek d’an ehanoù-se gant an Implijer. Kelaouet e vo an implijerien kement ha ma vo moaien d’hen ober.
- Ne vo nag evezh na kontroll a-berzh ar skolaj war danvez ar posteloù kaset ha resevet. Ne vo ket kiriak d’an eskemmerezh enta.
- Ar skolaj a c’hallo evezhiañ al lec’hiennoù bizitet gant ar skolajidi evit mirout outo da vont war lec’hiennoù maez lezenn pe difennet d’ar vinored, hag evit gwiriañ e talc’her da implijout ar Servij evit an deskiñ.
- An ti-skol a implij doareoù teknek evit mirout ouzh an implijer a dapout titouroù maez lezenn pe na zereont ket d’ar yaouankiz.

2.2 Endalc’hoù an implijer

- En em ouestlañ a ra an Implijer da chom hep stankañ ar Servij a-ratozh, ha da chom hep :
 - ✓ kuzhat e identelezh pe tapout ger kuzh kont unan bennak all.
 - ✓ falsañ pe tapout roadennoù implijerien all ar rouedad hep bezañ aotreet ganto.
 - ✓ terriñ mont-en-dro reizh ar rouedad pe unan eus sistemoù liammet ouzh ar rouedad.
 - ✓ lugañ pe klask lugañ diaotre gant ul lec’hienn.
 - ✓ ober gaou da yec’hed pe da gizidigezh un implijer all gant kemennoù, testennoù pe skeudennoù atahinus.
 - ✓ kemmañ pe distruj titouroù unan eus ar sistemoù luget gant ar rouedad.

KARTA IMPLIJ INTERNET, AR ROUEDADOU HAG AR SERVIJOU LIESVEDIA Eil derez Diwan

- ✓ implijout meziantoù graet evit mont dreist d'ar gwarez pe evit beuziñ an titouroù.
 - ✓ silañ meziantoù noazus (virusoù pe reoù all).
 - ✓ kemañ diaotre kefluniadur ar mekanikoù.
- Kelaouiñ a ray an ti-skol pa vefe kollet e godoù gantañ, ma yafent a-dreuz pe ma vefe klasket o laerezh.
 - Asantiñ a ra e vefe e-kerz ar skolaj an holl ditouroù rekis da lakaat ar rouedad da vont endro hag e c'hallfe ar skolaj kemer an holl disentezioù prim e ken kaz ma vefe lakaet reuz en e Servijoù, evel stankañ ar gwir d'ober ganto ma vefe un implij dreistmuzul pe na glotfe ket ouzh e balioù deskiñ.
 - An implijer a embann e toujo d'an dafar lakaet en e gerz ha ne glasko e mod ebet ober gaou da vont-en-dro ar servij.
 - Ma ne vefe ket doujet d'ar reolennoù-mañ e vefe kastizoù war-gresk.

AR C'HASTIZOÙ

- Kemenn d'an implijer.
- Difennet ober gant an urzhiataerezh e-pad ur pennad amzer.
- Difennet ober gant an urzhiataerezh betek dibenn ar bloavezh-skol.
- Kastizoù a genurzh (danevell, diviz skarz, ...)
- Kaset dirak al lez-varn e ken kaz ma vefe graet gaou d'al lezennoù.

An implijer a embann e oar ez eus eus ar garta-mañ hag en em lakaat a ra da zoujañ dezhi en he fezh .

Deiziad :

Anvioù ar sinerien

Tud ar skolajiad.ez pe an dud e karg

Ar skolajiad.ez

Sinadur

Sinadur



CHARTRE D'UTILISATION D'INTERNET, DES RESEAUX ET DES SERVICES MULTIMEDIAS

Collège Diwan Jakez RIOU KEMPER

PREAMBULE

Le collège s'efforce d'offrir à ses élèves les meilleures conditions de travail, notamment avec l'outil informatique : matériel, logiciels, réseau interne et Internet. Son usage participe à la formation de l'élève ainsi qu'à l'action pédagogique des enseignants. Chaque élève dispose d'un droit d'utilisation de l'outil informatique qui suppose de la part de chacun le respect du matériel et de certaines règles de fonctionnement, précisées par le règlement intérieur. Pour le confort de tous, le respect de cette charte et du règlement intérieur est une obligation qui s'impose à chaque utilisateur.

IL EST TOUT D'ABORD RAPPELE LA NECESSITE DE RESPECTER LA LOI

Propriété intellectuelle : les droits des auteurs imposent qu'il soit interdit de copier, d'échanger et diffuser de la musique, des vidéos, des logiciels, des jeux vidéos ou toute autre œuvre depuis le réseau de l'établissement.

Droits de la personne : il est interdit d'utiliser le réseau informatique pour véhiculer des injures ou d'une manière générale porter atteinte à l'honneur et à la vie privée d'autrui (interdiction de diffuser de fausses informations concernant autrui et de divulguer des renseignements d'ordre personnel).

Crimes et délits : il est interdit de visionner ou de diffuser des documents à caractère raciste, xénophobe, prosélyte, pédophile, pornographique ou incitant à toute forme d'actes illégaux (consommation de drogue, apologie de crimes...).

II EST ENSUITE CONVENU CE QUI SUIT

1. Les élèves ont accès aux services informatiques suivants

Services informatiques

- ✓ Utilisation des imprimantes : selon les modalités adoptées par le collège.
- ✓ Utilisation de disques durs externes / clé usb : pour des raisons de sécurité, l'utilisation de ces supports dont la provenance est extérieure à l'établissement n'est pas recommandée.

KARTA IMPLIJ INTERNET, AR ROUEDADOU HAG AR SERVIJOU LIESVEDIA

Eil derez Diwan

- ✓ Utilisation du scanner : selon les modalités adoptées par le collège.
- ✓ Copie de programmes : la copie et l'installation de programme sont interdites (droits d'auteur - virus - fonctionnement du réseau). L'installation de nouveaux programmes est sous la responsabilité du collège.
- ✓ Utilisation de tous les logiciels mis à disposition par le collège.

Services Internet

- ✓ Les élèves ont la possibilité d'accéder à Internet à des fins éducatives.
- ✓ Les boîtes aux lettres électroniques sont réservées aux usages pédagogiques.

Conditions d'accès

Chaque utilisateur se voit attribuer un identifiant et un mot de passe qui lui permettent de se connecter au serveur informatique du collège et à l'internet. Cet identifiant et ce mot de passe sont strictement personnels et confidentiels. Chaque utilisateur est responsable de l'usage qui en est fait : la communication à des tiers de ces informations, engage son entière responsabilité ; si le collège relève une infraction, la sanction sera appliquée à la personne désignée par le nom de connexion.

2. Respect des règles de la déontologie informatique

2.1 Les engagements de l'établissement

- Le collège s'engage à respecter la législation en vigueur (notamment lois relatives à l'Informatique, aux fichiers et aux libertés, respect des bonnes mœurs et des valeurs démocratiques, propriété littéraire et artistique).
- Le collège s'efforce de maintenir le Service accessible en permanence, mais peut interrompre l'accès pour toutes raisons, notamment techniques, sans pouvoir être tenu pour responsable des conséquences de ces interruptions pour l'utilisateur. Il tiendra dans la mesure du possible les utilisateurs informés de ces interruptions.
- Le collège n'exerce aucune surveillance ni aucun contrôle éditorial sur les messages envoyés et reçus dans le cadre de la messagerie électronique sur internet. Il ne pourra, de ce fait, être tenu pour responsable des messages échangés.
- Le collège se réserve la possibilité de contrôler les sites visités par les élèves pour leur éviter d'accéder à des sites illicites ou interdits aux mineurs, et de vérifier que l'utilisation des Services reste conforme aux objectifs pédagogiques.
- L'école utilise des mécanismes techniques de protection pour empêcher l'utilisateur d'accéder à des informations illégales ou non destinées à un jeune public.

2.2 Les engagements de l'utilisateur

- L'utilisateur s'engage à ne pas perturber volontairement le fonctionnement du Service, et notamment à ne pas :
 - ✓ masquer sa propre identité ou s'approprier le mot de passe du compte d'autrui.

KARTA IMPLIJ INTERNET, AR ROUEDADOU HAG AR SERVIJOU LIESVEDIA Eil derez Diwan

- ✓ altérer les données ou accéder à des informations appartenant à d'autres utilisateurs du réseau sans leur autorisation.
 - ✓ interrompre le fonctionnement normal du réseau ou d'un des systèmes connectés au réseau.
 - ✓ se connecter ou d'essayer de se connecter sur un site sans y être autorisé.
 - ✓ porter atteinte à l'intégrité d'un utilisateur ou à sa sensibilité, notamment par l'intermédiaire de messages, textes ou images provocants.
 - ✓ modifier ou détruire des informations sur un des systèmes connectés au réseau.
 - ✓ utiliser de programmes destinés à contourner la sécurité ou saturer les ressources
 - ✓ introduire de programmes nuisibles (virus ou autres)
 - ✓ modifier sans autorisation la configuration des machines.
- Il s'engage à informer l'établissement de toute perte, anomalie ou tentative de violation de ses codes d'accès personnels.
 - Il accepte que le collège dispose des informations nécessaires pour faire fonctionner le réseau et prenne toutes mesures urgentes pour stopper la perturbation éventuelle de ses Services, y compris en stopper l'accès en cas d'utilisation excessive ou non conforme à son objectif pédagogique et éducatif.
 - L'utilisateur s'engage à respecter le matériel mis à sa disposition et à n'effectuer aucune manœuvre ayant pour effet de porter atteinte au bon fonctionnement du service.
 - Le non-respect de l'une de ces règles entraînera des sanctions progressives.

LES SANCTIONS

- Avertissement de l'utilisateur concerné.
- Interdiction temporaire d'accès à l'outil informatique.
- Interdiction permanente d'accès à l'outil informatique.
- Sanctions disciplinaires (rapport, mesure d'exclusion, ...)
- Poursuites civiles et pénales en cas d'infractions aux dispositions légales.

L'utilisateur reconnaît avoir pris connaissance de cette charte et s'engage à la respecter dans son intégralité.

Date :

Nom des signataires

Parent(s) ou responsable(s) légale(s)

L'élève

Signatures

Signature